

## Sòn paotret Plouzeniel, Sant Neven hag ar Folgoat.

Var tòn : *Patronez dous ar Folgoat.*

### DISKAN.

Patronez dous ar Folgoat,  
Hor Mam hag hon Itron,  
An dour en hon daoulagad  
Ni ho ped a galon ;  
Hor sikourit, Mam Zantel.  
Avel diroll a ra  
Ten hag hir eo ar brezel,  
Ar peoc'h o Maria.

An oabl a zo fènval  
Var douar Breiz-Izel  
Klevet a reomp o iudal  
Ar c'hurun, an avel,  
An arne-ze 'zo savet  
Gant an diaoul he-unan,  
Al' lezen kriz 'zo skrivet  
Gant lizerennou tòn ! — *Diskàn.* —

Eur vanden tud penfollet,  
Tud euz ar re falla  
Gant an ifern dislonket  
O d'euz c'hoant d'hor flastra ;  
En dro d'ar skoliou kristen  
Gant an dud vad savet,  
Noz-deiz e rankomp difenn  
Diwal hor Sœurzet !

Er Folgoat, e Plouzeniel,  
E parrez Sant Neven,  
An dud a rank dilezel  
Ar parkeier melen,  
An eost mad da vidi,  
An dornerez savet,

Pa deu d'ar c'hleier sini  
En tour dantelezet !

---

Archerien ha soudardet,  
(Pebez micher d'ez-ho !)  
A zo brema kommandet  
'Vit mont a dreuz ar vro  
Da vruzuna dorjoug  
Var ty merc'hed santel  
Ha da gass er c'houentchou  
Ar freuz hag ar vrezel.

---

D'aoust ma z'omp torfetourien  
Pe laëron diskleriet  
'Vit kass d'eomp commiserien,  
Archerien, soudardet,  
Soudardet, hor bugale !  
Bugale savet mad,  
Savet e doujanz Douë  
Gant ho mam hag ho dad ?

---

Sevel a reomp hor mouëziou,  
Hor mouëziou kounnaret :  
N'eo ket var ar mogeriou  
A rank beza skrivet  
Ar pezh oll a c'houlennomp,  
Goude sikour Douë,  
Rag ar pezh a c'houlennomp  
N'eo 'med al liberte.

---

Al liberte da zevel  
Bugaligou kristen  
Gant ar Sœurezet santel  
A garimp da viken ;  
D'eomp-ni eo hor bugale  
Ha kousto pe kousto  
Biken ar skol dizouë  
Ne skolio anez-ho ! — *Diskàn.*

H. DU Ruygac